

D'an 8 a viz Meurzh

- War-dro 840, distro da Zoue ene **sant Teofilact**, eskob Nikomedia e Bitinia. Ober a reas eus e gêr ur gwir geoded eus ar garitez dindan warez sant Kosma ha sant Damiano hogen e voe harluet en abeg d'e fealded ouzh kehelerezh an ikonennoù hag e varvas e Caria, hiziv e Turkia.

- E 1550, **sant Yann Doue**, lean ha diazezour.

Genidik eus Bro-Bortugal e tec'has diouzh ti e dud hag e heulias e-korf tri bloaz ha tregont ur vuhez a gantreer. Bugel laeret ha dilezet gant ur beleg c'hwiblaer e ergerzhas Bro-Spagn hag e voe tro ha tro bugul, soudard, mevel, klasker-bara, devezhour, klañdiour, gwerzhour skeudennoù. Mont a reas zoken da vrezeliñ enep an Durked en Hungaria. E Gibraltar avat e voe kanttroet trumm gant sant Yann Avila a brezege e Grenada follentez trugarez an Aotrou. Sellet e voe outañ evel trevariet e spered ha kaset d'an ospital. Neuze en em lakaas e servij ar glañvidi all hag e savas un ospital e Grenada gant keneiled o tont da lodennañ e vuhez. Evel-se e krogas gant Urzh ar Garitez a zeuas da vezañ Breudeur Heberc'hourion Sant Yann Doue.

- En Iwerzhon, er V^{vet} pe VI^{vet} kantved, **sant Konnel** (Conainne pe Dachonna), abad-eskob Eachroim, diskibl sant Padrig, breur santez Athacht.

- En Iwerzhon, **sant Senan**, er VI^{vet} kantved, abad hag eskob.

Ganet en Iwerzhon en un tiegezh kristen eus Munster e voe soudard a-raok mont da vanac'h dindan an abad Cassidus e gasas da gKilmanagh en eskobiezh Osraige. Prizet evit e santelezh hag e brezennoù e sache davetañ kalz a birc'hirined. Diazezañ a reas manati Enniscorthy. Ober a reas ur birc'hirinadenn da Roma hag e kejas gant sant Dewi war enezenn Vreizh (Kembre). Sevel a reas meur a iliz hag a vanati a-raok en em staliañ war enezenn Inis Cathaigh war aber ar Shannon lec'h ma savas ur manati lec'h ma varvas.

- Bepred en Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **santez Konanez** (Iw. Conáine), c'hoar sant Senan.

- **Sant Konan Assaroe**, manac'h iwerzhonat.

- E 685, en Italia ar c'hreizteiz, distro da Zoue, **sant Kadal** (Iw. Cathal, Lt. Cataldus), Iwerzhonad, eskob.

Ganet e rannvro Munster, e voe diskibl sant Carthag Lismor. Bez' e voe eskob Tarento er Puglia, lec'h ma vez enoret gant an anv Cataldo.

- E Kembre, **sant Rhian**, roet en deus e anv da Llanrhian en Dyfed e Kembre lec'h m'emañ an iliz dindan e baeroniezh.

- E 1065, e Tayne e Bro-Skos, **sant Duthac**, eskob.

Genidik eus Iwerzhon e treuzas ar mor hag e teuas da vezañ eskob Ross.

D'an 9 a viz Meurzh

- E 320, e Sebasteia e Kappadokea, hiziv Sivas e Turkia, ganedigezh en neñvoù **sant Vivian hag e geneiled, daou ugent merzher Sebast**.

Daoust m'en doa kroget Licinius, ken-impalaer ar Reter, da bleustriñ Dezvenegezh Milano embannet gant Kustentin e krogas en-dro da heskinañ ar gristenion. E-touez reuzidi an heskinadegoù e konter daou ugent soudard eus an XII^{vet} legion anvet Fulminata e gwarnizon e

Melitena (hiziv Malatya e Turkia). War urzh ar prefed Agricola e voent jahinet kriz, staget en noazh e-pad un nozvezh war ul lenn skornet e voe torret dezho o divesker evit peurechuiñ d'o lazhañ.

- E 1440, e Roma, **santez Frañseza Romana**, mamm a diegezh ha da c'houde leanez. Ganet eo bet Frañseza Ponziani e Roma e 1384. Dimezet abred e vevas daou ugent vloaz er briedelezh, pried ha mamm a diegezh peurv, deol meurbet, skouerius a-fet uvelled hag habaskted. Dre ma oa gourmestr er vro e tasparzhas he madoù d'ar beorion hag e prederias ar re glañv. Intañvezet d'he daou vloaz hag hanter-kant e strollas en-dro dezhi un nebeut maouezed mennet da ren ar vuhez kensakret dindan Reolenn sant Benead.

- E 1463, distro da Zoue ene **santez Katell Bologna**, gwerc'hez, leanez hag abadez Urzh Santez-Klara. Donezonet evit an arzoù frankizek ha brudet evit he buhez kevrinel hag he gwelidigezhioù, e renas ur vuhez uvel er binijenn.

- E 1857, e Mondonio er Piemonte-Sardinia, ganedigezh en neñvoù **sant Domenico Savio**,. E dad a oa gov hag e vamm kemenerez, kristenion gredus o daou. Hag eñ ur paotr kuñv ha laouen mennet da servijout Doue e voe ambrouget war hent ar santelezh gant sant Yann Bosco hag e sachas e genvreudeur war e-lerc'h. Mervel a reas d'e bemzek vloaz goude ur vuhez santel ha skouerius.

- E Breizh, e 1038, distro da Zoue ene **sant Felis**, abad Rewiz. Ganet e Kernev e krogas, goude e studioù, da wazañ e lez ar c'hont e Kemper kent mont da benitiour war Enez-Eusa lec'h ma pledas gant sant Goustan. War c'houlenn an dug Jaffrez I^{añ}, a felle dezhañ adsevel an abatioù bet diskaret gant an Normaned, ez eas da adsevel abati Rewiz hag e drev e Logunec'h.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **sant Santan**, eskob.

D'an 10 a viz Meurzh

- E 334, **sant Maker**, henaour Jeruzalem. Diuzet e 313, e voe ur gwir savour : harpet gant santez Helena hag an impalaer Kustentin e savas brientilizoù ar Bez-Santel, hini Menez-an-Olived hag hini Betleem.

- E 483, e Roma, distro da Zoue ene **ar gwenvidig Simplis**, pab. Gwelout a reas dismantr Impalaeriezh Roman ar C'hornôg hag e tifennas gant kalon gwirioù an Iliz. Tra ma veze drastet Italia ha Roma gant ar Varbared e frealzas ar reuzidi, e labouras da unvaniezh an Iliz, hag e kretaas feiz goursenez Kalkedonia er C'hrist gwir Doue ha gwir den.

- War-dro 580, **sant Dogtove** (Gl. Doctovée pe Droctovée), abad, meneget e breviañ Sant-Brieg. Genidik eus Augustodunum (Autun), ez eas da vanac'h eno e manati Sant-Siforian renet gant sant Jermen. Hemañ, ur wezh deuet da vezañ eskob Pariz, a c'halvas Dogtove da gemer penn ar veleion garget eus brientiliz Sant-Visant-hag-ar-Groaz-Santel nevez diazezet gant roue Bro-C'hall Childeberzh I^{añ}, mab Klodwig ha santez Klotilda, hag a zeuio da vezañ abati Sant-Jermen-ar-Pradeier.

- E 626, **sant Atala** (Gl. Attale), abad Bobbio. O klask hent ar vuhez manac'h kenvez, ez eas da gentañ da Lerina a-raok mont da Luxovium renet gant sant Koulman Veur, a heulias e Bobbio en Italia, ma voe e werlerc'hier e penn an abati.

- E 675, **sant Emilian**, abad, warlerc'hier sant Fursa e Lagny-sur-Marne.

- E Kembre, er VI^{vet} kantved, **santez Kanna**, gwreg sant Sadorn, hemañ breur sant Ildud, tad sant Elient.

- War-dro 520, **sant Kezog**, Iwerzhonad, eskob en hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos diwezhatoc'h).

Bez' e vije bet tiern Cashel nepell diouzh Tiobraid Árann en Iwerzhon. Erruet evel eskob misioner e Bro-Skos en em stalias nepell diouzh Glasc'ho war enez Monk, e lenn Loch Laomainn, a zeuas da vezañ kreizenn e abostolerezh. Merzheriet e voe e Bandry, war ribl al lenn. Bez' e oa paeron Bro-Skos a-raok sant Andrev.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **sant Selvestr** (Iw. Siollan), eskob.

- En Iwerzhon, war-dro 570, **sant Sedna**, eskob.

Da gentañ manac'h, mignon da sant Luan, e voe abad Sier Kieran en Iwerzhon, abati bet diazezet gant sant Kieran, a-raok bezañ anvet eskob Osraige, eskobiezh bet gouarnet gant ebed-eskibion betek 1185.

- War-dro 750, **sant Himelin**, beleg pirc'hirin, iwerzhonat pe norzhbreizhat.

Mervel a reas o tistreiñ eus ur birc'hirinadenn da Roma e Vissenaken e Flandrez, lec'h ma vez kehelet c'hoazh.

D'an 11 a viz Meurzh

- Er I^{añ} kantved, **santez Eunike**, mamm Timozeos, meulet gant sant Paol evit he feiz (kv. 2 Tm 1,5).

- War-dro 308, e Kêr-Laodokea e Bro-Siria, **ar sent Trofim ha Thal**, a voe kroazstaget en abeg d'o feiz e doueelezh Jezuz-Krist.

- E 639, **sant Sophron**, henaour Jeruzalem.

Genidik eus Damas, e oa anezhañ un helavarour prizet pa guitaas ar bed evit mont da vanac'h. Mont a reas d'an Egipt ha da bPalestina lec'h ma voe anvet henaour Jeruzalem daoust ma ne oa ket kloer c'hoazh. Bodañ a reas ur senez evit prederiañ war unvaniezh nouez ar C'hrist. Sevel a reas sentbuhezioù, barzhonegoù ha prezegennoù. Buan avat e voe rediet, e 637, da lezel ar gêr santel d'ar c'halif Omar.

- E 712, en Hannonia, **sant Vindisian** (Vindicianus), eskob Cambrai hag Arras, mignon sant Amand.

Ganet e Bullecourt en Artez, e voe desavet dre aket sant Eloa, eskob Noyon, hag e voe degemeret e touez ar gloer gant sant Aoberzh, eskob Cambrai-Arras, ma voe e erlerc'hiad war sez an eskobiezh. Goude merzherenti sant Lejer e vroudas Tieri, roue Neustria, da zic'haouiñ an torfed-se er binijenn. Diazezañ a reas abati Honnecourt hag e savas manatioù all. Sebeliet e voe e manati Menez-Sant-Alar.

- E Breizh-vihan, er IV^{re}-V^{vet} kantved, **sant Beuzeg pe Budog**, abad en enez Lavred e-kichen Enez-Vriad.

Bez' e voe ur mestr brudet a sachas kalz diskibled en o-zouez sant Bodvael ha sant Tudi ha dreist-holl e voe kelenner sant Gwennole a voe kaset gantañ war un dro gant 11 keneil da ziazezañ abati Landevenneg.

- E 576, **sant Kustentin**, manac'h-beleg en enez Iona, a genlabouras gant sant Kendiern da brezeg an Aviel. Kentañ merzher Bro-Skos.

Hag eñ tiern en Devnon (Kernev-Veur) e renas ur vuhez direol a-raok mont da vanac'h dindan sant Koulmkell war enez Iona ma voe beleget. Mont a reas da ren ur vuhez penitiour da gentañ e Kembre ha da c'houde en Iwerzhon. Gant sant Kendiern e prezegas an Aviel e hanternoz enezenn Vreizh lec'h ma voe lazhet gant morlaeron.

- En Iwerzhon, e 824, sant **Aongus** (Unost, Aengus, Angus, Oengus, lezanvet *Culdée*), eskob iwerzhonat.

Manac'h e Tamlacht e-kichen Dulenn, keneil sant Mael, e voe abad hag eskob Clúain Eidhneach. Barzh brudet, e skrivas ur goueler gwerzaouet, *Félire Óengusso*, a-fet kounidigezh sent Iwerzhon hag e kenlabouras gant sant Mael evit skrivañ ar reolenn anvet *Céilí Dé*, "Kileed Doue".

- Sant **Liobran**, abad en Iwerzhon.

- En Iwerzhon, e 1653, e Cluain Meala, merzherenti ar gwenvidig **Yann Kearney**, beleg eus Urzh ar Vinored, merzher.

Da vare renad Olier Cromwell e voe kondaonet d'ar marv ha krouget evit bezañ pleustret e veleגיעzh en e vro.

D'an 12 a viz Meurzh

- E 295, e Tebez e Numidia, merzherenti **sant Maksimilian**.

Hag eñ ur c'hristen yaouank, bloaz-warn-ugent, e nac'has dougen an arouezioù milourel dre ma touge endeo "*sin ar C'hrist*" emezañ. Neuze e voe lakaet d'ar marv gant ar c'hleze.

- E 417, e Roma, distro da Zoue ene **sant Inosant I^{añ}**, pab.

Difenn a reas krog sant Yann Krizostomoz argaset diouzh Kêrgustentin; frealziñ a reas sant Jerom hag e harpas sant Eosten en e stourm a-enep donatourion Afrika an Hanternoz; stourm a reas evit mirout unvanidigezh an Iliz da vare drouziwezh an impalaeriezh roman.

- E 817, e Kêr-Samotras, **sant Teofan an Danevellour (pe Kronograf)**, manac'h ha feizvonnour. Hag eñ pinvidik ha tost ouzh an impalaer, ez eas da vanac'h hag e voe anvet higoumen ar manati en doa savet e-kichen Sigrian e Bitinia. Da-geñver eil Goursenez Nikaia, e tifennas kehelerezh an ikonennoù gant e helavarded hag e ouiziegezh, hag en abeg da se e voe toullbac'het e-pad daou vloaz gant an impalaer Leon an Armeniad hag harluet e Samotras lec'h ma varvas, brevet gant an amprouennoù.

- E 1022, e Kêrgustentin, **sant Simeon an Doueoniour Nevez**, kelenner speredel.

Dilezel a reas ur remzad foran e servij an impalaer evit mont da vanac'h. Dre e skridoù en devoe levezon war speredelezh ar Reter. Hervezañ e c'hell ar gristenion dont da vezañ emouez eus bezañ Doue enno gant ma asantont mont gant un argerzh a c'hlanidigezh diabarzh, gant keuz gwirion eus o fec'hedoù a-benn en em unaniñ ouzh Doue andon pep levenez ha pep peoc'h.

- E 1319, en Arezzo e Toscana, ganedigezh en neñvoù **ar wenvidigez Justina**, manac'hez beneadat a echuas he buhez evel penitiourez.

- E 1940, e San Remo e Liguria, **sant Luigi Orione**, beleg diazezour.

Diskibl sant Yann Bosco, e savas Oberenn Vihan Ragevezh Doue evit mat ar yaouankizoù hag an dud dilezet hag ivez Mibion ar Ragevezh, C'hoarezed bihan ar Garitez, C'hoarezed dall ar Sakramant, ha Penitiourion Sant Alberzh.

- E Breizh-vihan, e 572, **sant Paol a Leon**, lesanvet *Aorelian*, abad hag eskob kentañ Bro-Leon, ganet e mervent enezenn Vreizh (Kembre), stummet gant sant Ildud, a savas manatioù en Enez-Eusa, e Kastell-Paol hag en Enez-Vazh lec'h ma varvas.

- D'an hevelep deiz, diskibled o-daou da sant Paol: **sant Kiel**, manac'h, en deus roet e anv da barrez Plougiel e-kichen Landreger; ha **sant Vivien**, manac'h, penitiour e Lambaol-Gwitalmeze.

- Bepred er VI^{vet} kantved, **sant Mabon**, eskob Leon, diskibl sant Goulven.

- E 1107, **sant Rolan II** (Lt. Rollandus), da gentañ manac'h en abati Menez Lokmikaël ha da c'houde eskob Dol. Mont a reas da welout ar pab Urvan II a roas dezhañ ar pallium.

D'an 13 a viz Meurzh

- E 596, **sant Leandr**, eskob Sevilla e Bro-Spagn, breur sant Izidor, sant Fulgentius ha santez Florenza.

Dre e brezegerezh hag e labour abostolek e lakaas ar Visigoted da dremen eus an disivoud ariat d'ar feiz katolik.

- E 857, merzherenti **ar sent Rodrig ha Salomon**, e Kordoba en Andalousia a oa dindan wask an Islam.

Rodrig hag a oa beleg a voe flatret gant e vreur gonezet d'an Islam. Kondaonet d'ar marv e voe taolet neuze en toullbac'h lec'h ma kavas ar c'hristen Salomon en doa entuet d'ur mare gant an Islam met a oa distro d'ar C'hrist. Dibennet e voent o daou en abeg d'o feiz.

- E Breizh, er V^{vet} kantved, **sant Kemev**, penitiour e Lokemo, breur sant Kadoù, keneil sant Kiriav.

- E Breizh, **sant Taran**, iwerzhonat, penitiour e Bro-Dreger.

- **sant Tuder pe Tudri**, eskob, genidik eus Iwerzhon, vije deuet da Vreizh gant sant Eflamm. Penitiour e vije bet a-raok dont da vezañ eskob Ar Yeoded (Tuterius). Roet en deus e anv da barrez Treduder e Bro-Dreger, hag ivez marteze da chapel Sant-Utel war barrez Maoron, en eskopti Sant-Maloù.

- En Iwerzhon, e 655, **sant Mochoemog pe Kevin** (Lt. Pulcherius), abad.

Genidik eus Iwerzhon, niz santez Ita, e voe desavet gant sant Komgall e Bangor. Diazezañ a reas abati Liath Mór e kontelezh Tipperary. Mignon e oa da sant Fursa.

- Bepred en Iwerzhon, e 732, **sant Gerald**, ganet e Bro-Saoz, abad diazezour abati Mayo.

D'ar 14 a viz Meurzh

- Er IV^{re} kantved, merzherenti **sant Leon**, eskob, moarvat reuziad an ariaded.

Hervez un enskrivadur a lenner war e vez bet savet gant ur romanez deol en Afro Verano en doa "*bet ar c'hras da evezhiañ ent-feal ouzh tropell ar C'hrist.*"

- E 968, e Kêr-Halberstadt e Bro-Saks, distro da Zoue ene **santez Matilda** (Gl. Mahaut pe Maud), intañvez roue Germania.

He buhez a ouestlas d'an oberoù a garitez hag e tiazegas pemp manati.

- E Breizh, er ^{VI}^{vet} kantved, **sant Hegareg**, abad, keneil sant Tegoneg, o-daou diskibled sant Paol Aorelian.

- E hanternoz enezenn Vreizh, er ^{VII}^{vet} kantved, **sant Kirin**, eskob.

- En Iwerzhon, ^{VII}^{vet} kantved, **sant Talmag** (Iw. Talmach), abad.

Diskibl sant Finnbarr diazezour manati Etargehael a voe orin Corcaigh (Kêr-Kork), e tiazegas ur manati-all.